

Breizh Brevez

Kristian BRISSON

An Hent

Per-Jakez HELIAS

Yann ar Burzudou war e dorchenn

H. GAUDART

Ar repu diweza

BRUD NEVEZ

Kelaouenn vrezonég mizieg.

Niverenn 50 – Miz kerzu 1981.

Rener: Andreo Merser.

Sekretour: Jakez Salaun.

An oll lizerou ha skridou a zo da veza kaset da: BRUD NEVEZ, 6, ru Beaumarchais, 29 200, Brest.

Priz an niverenn-mañ: 10 lur.

Koumanant-bloaz:

– priz ordinal: 60 lur.

koumanant skoazell: azaleg 80 lur.

studierien: 40 lur.

broiou estrañjour: 90 lur.

Eur houmanant-bloaz a dalvez evid 10 niverenn.

Ar chekennoù bank a zo da veza kaset war-eeun da: BRUD NEVEZ, 6, ru Beaumarchais, 29 200, Brest.

Ar chekennoù post a zo da veza lakaet war K.R.P. « Brud Nevez », 893-94 P, Roazon.

I.S.S.N.: 0399-7014.

Diskleriet hervez al lezenn: pevare trimiziad 1981.

C.P.P.A.P.: nn 34 627.

Ar merour: P.M. Mevel.

Moulllet ez-prevez gand BRUD NEVEZ.

C. evid an oll bennadou.

N'eus ket a aotre d'embann eur pennad diwar BRUD NEVEZ heb beza bet an aotre d'henn ober.

Ar skridou hag ar pennadou a vez embannet e BRUD NEVEZ n'emaint ket da veza lakaet war gont ar gelaouenn heh-unan, war gont ar re o-deus skrivet anezo hebken.

Ar skridou ne vint ket embannet a vo kaset endro ma vez tu.

Embannet e vez BRUD NEVEZ gand skoazell EMGLEO BREIZ.

Taolenn

On 50ved niverenn, gand J.S.....	3
Ar repu diweza, gand H. Gaudart.....	5
Gwerz eur martolod koz, gand Yann Morvan.....	7
An hent, gand Kristian Brisson.....	9
Yann ar burzudou war e dorchenn, gand Per-Jakez Helias.....	21
Heol glaz an tri Yann, gand J. Goyat.....	27
Energieziou Bro-Danmark, gand F.B.....	29
Keleier Emgleo Breiz.....	31

Ha paeet ho-peus hoh adkoumanant ?

ON 50ved NIVERENN

Stad a zo ennom, a hellom anzañ, o kas deoh an 50ved niverenn-mañ euz **Brud Nevez**. Pemp bloaz 'zo deuz ze, e reem or zoñj cheñch stumm da **Vrud**, ha lañsa **Brud Nevez**, gand sikour tud all ha ne oant ket e-barz ar skipaill a-raog. Diêzteriou a-walh on-eus bet abaoe miz genver 1977, ha skoillou a beb seurt on-eus kavet war on hent. Koulskoude, ma klaskom ober, na pa ve nemed berr-ha-berr, eur gont euz kement on-eus greet war bemp bloaz, e hellom skriva kement-mañ:

- da genta, gand an 50 niverenn-ze euz **Brud Nevez**, eo 1608 pajennad a vrezonég on-eus moulet abaoe 1977: sed aze hag a ra war-dro 320 pajennad ar bloaz. N'eo ket divalo, moarvad. Ha ne gontom ket aze, evel just, al leoriou pe leoriougou a zo bet moulet ivez war gont **Brud Nevez** er memez amzer.

- d'an eil, e kav deom beza bet kinniget abaoe an niverenn genta eun toullad mad a skridou, hag a zo eur halz anezo a dalvoudegez, ken e-keñver danvez, ken e-keñver stumm. Pe e vijent barzonegou, peziou-c'hoari, danevellou, kontadennoù, eñvorennoù, beajou, studiadennou, pe draou all c'hoaz, om sur e vo plijadur hag interez oh adlenn anezo c'hoaz diwezatoù.

- d'an trede, anioù nevez a skrivagnerien on-eus lakeet ivez ol lennerien da zizoloi, evel on-oa fiziañs d'henn ober azaleg an niverenn genta. N'emaom ket, evel just, o vond da zevl amañ eur roll anezo, gand aon d'anhouahaad hini pe hini, med deuet eo ar skrivagnerien-mañ da greñvaad skipaill **Brud** koz ha da rei muioh a lusk d'ar gelaouenn.

- d'ar pevare, eo bet kresket niver koumananterien **Brud Nevez**.

Penaos kompren neuze ne vije ket taolet kement-se a evez euz al labour a reom hag e chomfe meur a hini dizeblant e-keñver **Brud Nevez**? Bez' ez eus zoken tud ha ne fell ket dezo en em renta kont euz ol labour, hag o-deus a-wechou beteg disprizañs evid or helaouenn. O follennata an 50 niverenn on-eus lakeet da zond er-mêz war bemp bloaz, e welfe koulskoude neb piou a zo a volonteaz vad n'eo ket dister ar pezh ah embann **Brud Nevez**.

Estreged ar poenchou mad a zo memestra. Evid pezh a zell ar goumananterien, pa gomzem anezo, n'eo ket bet ken kresket an niver anezo ha m'on-ije bet ezomm: deuz an tu-ze, ez eus moarvad eun tamm mad d'ober c'hoaz da rei gwelloc'h ar gelaouenn d'anaoud. Ahend-all, n'om ket bet deuet a-benn bepred d'ober euz **Brud Nevez** ar pezh on-nije bet karet: meur a wech eo on-eus huñvreet e traou all d'ober hag e skridou all d'embann.

Tamm ha tamm marteze e teuy an huñvreoù da wir. An 50ved niverenn-mañ eo ivez ar henta ha kant euz **Brud**, hag a oa bet deuet an niverenn genta anezi er-mêz en hañv 1957. Bet zo bet greet eun tennad mad a hent abaoe. Gand fiziñs ha pennegezh e hellim derhel gantañ, gand skoazell or houmananterien, ol lennerien hag or henlabouerien ivez.

J.S.

D'an 30 a viz genver 1982

M'eo bet berr-tre respont Jord Filioud, ken frêz all eo bet: dileet eo da yezou Bro-Hall beza klevet war ar skingomz hag ar skinwel. Ha roet vo ezo ar gwir-ze, hervez m'eo bet lavaret-groñs gand ar Ministr: « **Bez' e vo unan euz kevridiou pouezusa an aozadurioù digreizennet da zond da rei o ichou ha skigna yezou ha sevenadurioù ar rannvroù** ». Sed eno eur ouestladenn par da hini Alan Savary o tisplega eo kelenn ar yezou ha sevenadurioù-ze unan euz uhel-mennadoù e garg a vistr.

Dambar hepken an diou bromesa, avad, eun diforc'h a-bouez etrezo: m'e-neus kemennet ministr an Deskadurezh e vo divizet gantañ reolennoù nevez a-benn eun nebeud mizioù, ministr ar Hemenn, eñ, ne gomz euz lakaad seveni e venozioù nemed a-benn ma vo diazezet da vad « aozadurioù-rannvro » ha n'eo ket bet termenet evid c'hoaz ar pezh e vint. Evid gwir an organadurioù-mañ ne hellint ket krog da vond war-raog nemed e troioù hanter 1983, d'an abreta. Daoust hag ahann di ne vo kemmet tra en doare kasauz ha mezuz a vez implijet gand ar Radio-T.V. e-keñver or yezou? Daoust hag e vo ranket gortoz eur bloaveziad all... pe vuioh? Daoust ha ne vo krouet abadenñ ebed er broioù ma n'eus ket diouto? Nag hirraet padelez ha kresket niver an abadennoù berr o vond endro er broioù all?

Hag amañ, e Breiz, ha dalhet e vo d'on abadennoù brezoneg ar mareoù-amzer ken striz o-deus bremañ, gand eurveziou ken divalo dezo hag evito yalhadoù skragn d'o zevet?

Adal **penn kenta 1982** eo e tie beza divizet ar cheñchamañchoù gortozet abaoe keid-all! Ne heller ket kas da galz pelloc'h seveni promesaou ar Prezidant hag ar gouarnamant. Pe, da nebeuta, divizoud ober **eur rummad kenta a wellaennoù**, da hortoz ae reolennoù pouezusoh a vo embannet da houde gand ar Rannvroioù o-unan, diwezatohig.

Dileet eo da Zervij boutin ar skingomz-skinwel 'vel m'emañ bremañ rei d'or yezou, ha d'or yez-ni, Bretoned, eta! hag heb dale hirroh, eul lodenn deread euz ar plas a die beza o hini hervez, ne lavarom ket tra ken nemed promesaou ar strolladoù a gaver e penn ar vro, hogen ivez, arabad ankouaad, **hervez ar reoliadur etrevroadel** bet sinet gand Bro-Hall.

Miz kerzu 1981.

HA LAMMET E VO KUIT ABADENN DELE AL LUN ?

Daoust hag emañ ar brezoneg o vond da goll, e 1982, unan euz an abadennoù, muzuliet ken striz koulskoude, a oa bet asantet rei dezañ en tele? Dre ziouer a zanvez, e vo ranket, heb dale moarvad, dilezel ar skingasadenn **Hekdeo an deizioù** a vez skignet d'al lun abaoe miz even 1980 hag a vez maget gand filmoù bet savet e-pad bloaveziou kenta **Breiz o vev**. Setu bloaz hanter ma lavarer hag ez azlavarer ne hello ket padoud eur seurt abadenñ ma ne asant ket FR3 implij eul lodenn vihan euz h arhant evid aoz filmoù nevez, sklêr ma 'z eo ne zaleo ket da vond d'an hesk bernig programoù kenta e liou **Breiz o vev**. (...)

Bez' ez eus koulskoude eur hresk e niver hag e padelez an abadennoù tele e brezoneg hag a oa divizet 'barz ar Chart! Ha petra 'ta ez eus bet greet gand FR3 nemed touella ar bobl, gand lakaad adskignadennou e plas filmoù nevez hag o chom heb

MOND PELLOH

Dimeurz 10 a viz du, da geñver studi budjed an Deskadurez, er Gambr, e-neus Erwan Dollo, kannad bro-Zant-Brieg, embannet pegen talvouduz eo ar pezh a zo bet diskleriet, ar miz all, gand Alan Savary, e Montauban, dirag eur bodad kelennerien karget da stumma mistri an derez kenta war studi yezou ha kulturioù Bro-Hall. Roet e-noa ar ministr da houd e fell dezañ gweled ar skolioù o labourad da gas war-raog personelezh ar Rannvroioù. (...)

O veza lakeet war-wel an esper diwanet da heul komzou ar Prezidant ha Ministr an Deskadurez, e-neus Erwan Dollo goulennet neuze ouz Alan Savary diskouez bremañ an dalvoudegezh douget gantañ ouz kelenn yezou Bro-Hall. Evid gwir, digoret eo bet dija an hent gand al lisañsou war ar brezoneg, gand urzia en eur hiz nevez kelenn ar horeg ha gand lakaad eun toullad mistri da vond a skol da skol en o hornad da gelenn o yez. « **Red eo avad mond pelloh, kalz pelloh**, a lavaras Erwan Dollo, **gand kroui postou skolêrien, kuzulierien, kelennerien skolachou, liseou ha skolioù-mistri karget euz kelenn yez o bro** ». (...)

En e respont, adlavaret eo bet gand Alan Savary ez eo unan euz mennadoù ha youloù braz e garg digeri da vad « **war eur politikerezh gwirion o kas war-raog ar yezou ha sevenadurioù rannvro** ». Da heul ar brederiadeg hag ar guzuliadeg lakeet en hent war gement-se er Rannvroioù e vo termenet ha diskleriet ar pal da dizoud, ar reolennoù da embann hag ar yalhadou da gaoud evid-se. Al labour-prederia ha kuzulia-ze emeur krog ennañ dija e peb derez ar helennerzh hag ar mererezh. Dleet eo d'al labour emgleo hag enklask embreget en Akademieziou kas, ahann da zibenn ar bloaz 81, da ginnigoù ouz ar ministr, ha neuze d'ar reolennoù ha kemennadureziou divizet gantañ eun nebeud miziou da houde, abred a-walh eta evid beza lakeet da dalvoud pa zigoro ar skolioù e miz gwengolo 82. (...)

15.11.81

RED GORTOZ EUR BLOAVEZ ALL, JORD FILLIOUD ?

Nebeud amzer goude respont Alan Savary er Gambr da Erwan Dollo, ez eus bet klevet hini **Jord Fillioù** ouz goulennou Renea Soum, Rodolf Pesce ha Yann-Ber Destrade, diwar-benn rei digor da vad d'ar yezou ha kulturioù rannvro war ar skin-gomz hag ar skinwel. Ar gannaded-mañ, anezo dileuridi broioù Oksitania, Katalonia hag Euskadi-Nord, a houlenne digand Ministr **ar Hemenn** m'o-defe ar **yezou rannvro** estreded frapadoù eur hardeurig war ar radio ha tra ken nemed eur vunutenn bennag war an tele. (...)

Mil boentennag war an tele. (...) Mil boent eo, ez eus bet lavaret da Jord Fillioù, rei da bostou or broioù peadra kaoud tu da skigna abadennoù hir a-walh e pep hini euz o yezou.

32

A-wechou, nehet gand ar gor
Pe gand ar skorn a-wechou all;
C'hweh miz o stleja war ar mor,
Evel-se on-me bet gwechall!

O! nann! n'em-eus tamm keuz ebed;
Daou vignon om ar mor ha me,
Chomet bepred 'vel daou bried
Sod-mad an eil gand egile!

Da houlou-deiz, ez an bemdez
D'ober eun dro war an tevenn,
Hag on-daou, neuze, asamblez,
Ni gan ar memez kanaouenn.

Kan ar martolod digenvez
'Penn ar wern o hunvreal;
Kan ar mor don ha digompez,
Kan ar gwagou o kantreal.

Etre an neñv hag ar mor don
Emañ baradoz ar Breizad,
Eno e kav peoh e galon
Ha d'e skevent eun èzenn vad.

Ho pedi' ran, va mignoned,
Goude va maro d'am lakaad
'Kichenn ar mor, en eur vered
'Leh ma teuo d'am luskellad!

YANN MORVAN.

7

Ha ragprenet ho-peus

**Liberterien oh embann
eur gelaouenn vrezoneg
BRUG :1913-1914**

Eur studi hag eun dibab a bennadou gand

Fanch BROUDIG

Eul leor a 250 pajenn pe war-dro: 42 lur.

Leor ar miz:

RIMADELLOU

260 rim adell

64 divinadell

bet dibabet gand

A. MERSER

Eul leor 15 X 21, gand eur golo brao:
20 lur (150 g)

AN HENT

Kontadenn

E KORN AN OALED

E koroll ar flammou e klaskan va hent,
Echu an amzer gent.
Ar strakennou diroll a zo kollet ganto
Neudenn va zoñjenn.
Elfennou drant a nij enno
Va hoant didrehuz da guitaad va annez,
Kan espar va huñvreou kuz.

E korn an oaled e oa va levenez
Sioul ha divalh.
Bremañ, avad, e tro dizehan, don ennon,
Froudenn an dehadenn.
Dilezel rin da vad va oll zud hag ar re
Dihouzvez d'am mennad.
Rag, drebet on gand ar hoant
Da gutuill bleuniou koant
War roud va flanedenn.

Tomm e oa er gêr. Hag eno e veven e-ser va zud. Hag e
soñje din am-bije bevet e-giz-se dineh hag eüruz va bu-
hez-pad.

Pa hoarien tro an ti e oa a-walh din arvesti ouz ar gwez-
avalou, ouz ar bleuniou. Ha pa gerzen war an tirien, e-kreiz
an heol, evedo va halon leun-barr a levenez. Pucha reen,
neuze, da zelled ouz kellidou bresk ar foeon o tiwana e-
tousesk ar geot. Ha da vare Nedeleg, pa zigore broñsou koveg
ar hamelia, ne skuizen ket o klask anezo euz a-douez deliou
lufuz ar gwezigou.

Repu al lapoused bihan e oa ar harz endro d'al liorz. Nag a
blijadur am-beze ouz o gweled o hourlammad war al leto-
nenn nevez-trohet a-benn kaoud buzug pe hwiled. Sevel a

Da goulz an nevez-hañv e tarze ar vuhez en he splanna. Ne veze diouz ar gwez nemed eur boked, a goueze diouto, gand an disterra mouch avel, deliou-bleuñv damheñvel ouz an erh o leda eur pallenn tano war ar bokedou-lêz.

Ral a wech e sellen dreist ar harz. Ral a wech e sellen ouz an hent a dremen dirag on ti. Perag klask pelloh ar pez a gaver ennor? Pa zassone ennon kanenn-veur ar bed, heb beza dao din mond da zelaou anezi e leh all; pa gaven eno skleri-jenn an heol, skleur al loar, liviou livrin frouez an douar; pa welen endro din dremmou koant an annezidi a oa joa va halon, perag 'ta ez afen war-lerh touelladennou, dres pa zanten flourikadenn dorn va mamm war va fenn da vare ar houmoul du?

Eno eh en em gave va mignoned, ivez, hañv-goañv. Astennet war an tirien, pe bodet e-tal an tan. Neuze e save ennon eur from dispar pa hellen tañva eur garantez dinamm. Rag, karantez an hini eo a vage va buhez. Digemer a reen anezi evel mel va bugaleaj. Brokuz e oa va mignoned ha n'am-boa poan ebed o renta dezo a-buill teñzoriou kinniget din gand kemend a largentez.

Na perag am-bije sellet pelloh dreist ar harz? Na perag am-bije bet c'hoant kemer an hent?

Koulskoude, eun deiz, am-boa sellet dreist ar harz pelloh evid na oan kustum. Koulskoude, eun deiz, am-boa kerzet eur pennadig war an hent a ziskenn beteg traoñ ar roz.

Abalamour da betra? A-benn gweled an heol o tiskenn a-dreg an dremmwel, moarvad. A-benn gweled daoulagad glaz am-boa spurmantet a-greiz va hun, marteze.

Abalamour da betra? A-benn goulenn digand an avel petra oa en tu all, a-hont, kredapl. A-benn goulenn digand an hent da beleh e kasse ahanon ma 'z afen d'e heul, piou 'oar?

Hag azaleg an deiz-se n'am-boa greet tra ken nemed birvi gand eur hoantadenn direzon. Dond a ree va mignoned du-mañ, evelato. Flourikadenn va mamm a oa tenerroh evid biskoaz.

Siwaz! Ar garantez-se, hag a vleunie en ti, hag he-doa beuzet ahanon a-vihannig, a oa krog da wenvi em hreizig-me.

Huanadi reen aliesoh-alies, kement ha ken garo ken e selle va mamm ouzin, eun dristidigez livet ganti war he fas madelezuz. Kempenn a ree eur guchennadig bleo difoupet diouz he hoof, kement ha kuzad an doan ne oa ket dezi. Meur a wech e kredas din gweled daelou o lugerni e korn he daoulagad glaz-gwer, tra ma krize eun disterig linenn hlan he zal tra ma rede eur gridienn war grohenn guñv he dioujod.

ree eur frond yahuz diwar an douar ken e leugnenn va bruched gantañ evel pa vije bet boued saouruz d'am horv yaouank.

Sevel a ree en he sav pa zone seiz eur gand an orolaj, hag hi da lakaad he zavañjer da aoza koan. Dre ma'z ee gand he labour e chomen-me dirag an tan, o klask e-touez ar flammou eur respont d'am goulennou. Rannet e oa va halon. Ha koulskoude e save ennon, kreñvoh-kreñva, ar c'hoant direol - mond kuit! Setu ar respont nemetañ a gleven. Sachet e oa va ene en desped din p'evedo-eñ o nijal dija war-zug an daouzeg steredenn, war-zug an hun burzuduz, war-zug an ollved. Ha gand ar braz ma oa va from e krogen da vaga soñjou du staget ma oan ouz ti va hendadou, ouz leh va ganedigez.

Pa deue ar zerr-noz, avad, e plije din atao en em gaoud e korn an oaled, va skudellad yod-kerh ganin war va barlenn, daoust da hourdrouzou va zad na oa ket evid gouzañv va doareou.

« Ouz taol gand ar re all! » e ouie lavared. A-wechaigou, dre heg pe dre gaer, n'on ket evid hel lavared, e tizoñje ahanon, aze, en deñvalijenn.

Neuze e tihune va hoantou. Ha leuniet e oa va boud gand an hiraez da vond kuit.

AN HENT GLAZ

Edo dirazon med ne hellen ket bale. Ne oa ket boazet va zreid ouz an hent kaled-ze. Hag eet e oa va divesker evel stoup dindanon. Badaouet e oan ive gand an trouz a gleven a beb tu ha ne oan ket boazet dezañ kennebeud. Ha seul ma 'z een, seul greñvoh e teue an trouz-se da veza. Kirri a beb seurt, herr ganto, a dremene e-biou d'am hichenn. Hag e soñjen neuze penaoz e vije gweloh din mond war va hiz.

N'her gris ket, avad, dre ma ouien e ranken bale atao daoust da beb tra evid tizoud ar pal a oa tonket din mond davetañ, koustfe pe goustfe! Ne hellen ken na trei va fenn da zelled a-dreñv na soñjal en amzer dremenet. Setu 'ta, diskenn a reen gand an hent en eur ruza va zreid tra ma tave a-nebeudou an trouziou kent, ha ma hlaze an amzer-vremañ.

Dirolla ree em spered skeudennou touelluz. Boudal a ree em dioukouarn moueziou hoaluz. Red e oa din senti outo ha digemer anezo laouen. Daoust ha ne oa ket diouto ar skeudennou hag ar moueziou deuet beteg ennon e korn an oaled pe e-kreiz va housk?

Treuzet am-boa treuzou on ti ha diwar neuze e kavjen bod e annez an estrañjourien. Eun ti nevez a vije hag a zigemerje ahanon. Kement-se a zerefe ouz stad nevez va buhez. Rag, eur baleer-bro oa ahanon hiviziken - mond war-raog, klask bepred!

A-greiz-oll e oen karget a levez e sell an amzer-dazond. Nag a draou am-bije da zeski! Nag a blijadurioù ambije da zizolei en eur vond gand an hent.

Evid ar mare e tiskenne an hent-se beteg tre baradozig an draonienn.

Ha setu, dres d'an ampoent, e reas an heol lagad bihan euz a-douez ar goabrenn. Glaster an deil a lufas, gleb ma oant c'hoaz gand glizenn ar beure. Ha pa grene an deliou e korolle skedou damguz lagad an deiz war va dremm entanet. Koueza reas trumm eun dousder heb he far. Kregi reas ennon ken dihortoz ha tra. Richan al lapoused a dride ar hleuziou ganto. Goustadikoh e valeis er briz-heol a-benn leunia va oll boud gand an traou dianav-ze.

Hag e kredas din klevet eur zon o sevel diouz kostez ar pont, a-hont, en traoñ, e leh ma treuz an hent a-uz d'ar stêr o hiboudi. Eur han e oa, hag ar vouez a gane anezañ a oa ken sklintin, ken lirin, ken e chomis a-zav evid e zelaou.

Eur plah an hini oa o kana. Ne welen ket anezi, avad, hag evid-se e tiskennis etrezeg ar pont mên ken koz hag an amzer.

Bolzet kaer e oa ar pont hag ar stêr gand skourrou ar gwez a greske war ribl an dour. Distanuz e oa hag ouspenn-ze e kavis eno eur zioulder beohuz e teñvalijenn ar volz-se.

Tevel a reas ar vouez. Ha p'evendon oh en em houlen piou bennag a hellfe beza, setu ma welis tres eur plah gwisket ganti eur zê wenn oh en em zila e-touez ar gwez. Ha me da vond d'ar red da dapoud anezi, pe den pe spes e oa.

En tu all d'ar pont e oa stank ar brouskoad ken e oen kollet dizale er strouez. Ha kollet am-boa ive ar skeud ken prim, ken lijer he zreid ken e oa steuziet eno, evid doare.

Goude eur frapadig amzer eh adkavis ar pont. Mond a ris war va hiz, gorreg, losteg an tamm ahanon.

Neuze, dihortoz-kaer, edo ar plah aze, evel pa vije bet ouz va gedal. Diwar he gweled, ne oen ket pell o kredi e oa diouti eur gorriganeg ganet gand an draonienn hlaz. Ne welen

nemed ar pennad bleo arhantet, liou skleur al loar ganto, ar zê wenn hag eun drolinenn lusket gand eun êzenn flour. Heñvel a-walh ouz ar glandour e redou ar gwaziou e oa he jestrou, jestrou ledan ha skañv tra ma stage endro gand he hanenn strobinnelluz.

Ne greden ket tostaad outi. Dres d'ar houll-se eo e verzis he daoulagad glaz espar. Skedi reent en he fenn evel daou vên prisiuz, treuzweluz, ha bervi ree enno paillurennoù heoliou ar bed-oll.

Bale ris etrezeg enni, avad, med ne reas van ebed. Azeza ris war bardell ar pont peogwir e kendalhe gand he han heb selled ouzin. Dispourbella reen va daoulagad oh arvesti ouz luskad he horv re-bar d'eur horoll sakr.

Ha setu ma kane evel-henn:

Diou steredenn hlaz a oa euz va daoulagad,
Diou skeudenn dan.

Diou valafenn wenn a oa euz va daouarn,

Diou goulmig a oa euz va divronn,

Ken tener ma krenent ennon.

Siwaz! Tizet on bet gand bir ar chaseour,

Treitour! Bet e oa-eñ va muia-karet.

Ha maro eo va huñvre,

Lazet eo bet va ene!

Dre ma kane e sellen outi, bamet, stênet ar paour-kêz ahanon. Dreist-oll e oan lakeet nehet gand he homzou. Hag en-kreiz a grogas ennon. Ne welen ken anezi nemed en eur vrummenn dano. Beb an amzer ez ee en he daouleg ha gand he daouarn, par da valafenned o nijal-dinijal, e kutuille, amañ hag a-hont, bleunioù iskiz na welen diouto nemed o liou diniver.

Pa oe echu he zon ganti, e stagas da gorolli, dillo, ha da drei warni heh-unan en eur rei din hag en eur strewi endro dezi ar vrehiad dastumet ganti. Kredi a ree din evedo va halon dare da darza gand an trivliad am gouneze. Berr oa warnon dirag kemend all a gened.

A-nebeudou ez eas he horoll war he gorregez ha pa jomas a-zav e wagenne c'hoaz plegou he zê. Ha lugerni ree he bleo evel arhant-beo.

Neuze eh astennis va divreh war-zug enni. Kerzoud a ris daveti a-gammejou lentig. Lammad a ree va halon em askre gand ar hreñv ma oa va esmae.

Med pa falvezas ganin steki outi ne jomas em daouarn ne-
med poultr alaouret eur bann-heol treuzet gantañ ar volz
stank.

AR GARRONT

War ziskenn ez ee an hent. Hag aliez e vezen strobet gand
mein ar garront. Rikla a reen gand ar glebor a oa ar vein
gwisket gantañ. Flistra ree eienennou diouz an douar ha di-
vera ree an dour diouz ar hleuziou. Leun e oa ar foziou gand
ar glaeier diweza. Ha kan ar stivellou a zihune an endro
morgousket.

Ar gwez kelvez, dero, kistin ha fao a ree euz ar garront eur
riboulig teñval, eun distan d'ar horv koulz hag eun diskuiz
d'ar spered, daoust ma krenen eun disterig gand ar freskder
a rene eno.

Petra bennag a hoarvezfe, dibabet am-boa an hent-se. F'ez
e oan deut da veza o sevel gand ar grapenn dindan gwrez an
heol yaouank o tarhaoui ken garo ma ne oa ken diouzin ne-
med dour-c'hwez. Ha p'am-boa gwelet an hent-karr digor
war an tu dehou, ne oan ket chomet da dortal pelloh. Koustet
a goustfe, poent e oa din ober eun ehan, diskregi mui pe vui
diouz va baleadenn arvaruz.

Ha setu m'edon o kerzed war-zug eur bed dedennuz: henn
santoud a reen em hreiz heb gouzoud e gwirionez pe vad pe
fall e oa bet an dibab-ze. Gand ar haled ma skoe va halon e
ouien ervad e oan krog gand beaj veur va flanedenn.
Paneve-ze e vijen eet war va hiz, rag, kollet e oan, anad oa
din. Ne vern! Mond a rafen beteg ar penn.

Eet e oan e-biou d'eur hanndi koz, hanter-frezet an do-
enn anezañ, stanket ar stêr gand al lastez, pa zizolois an ti.
N'am-bije ket gwelet anezañ anze e oa krog ennon eur frou-
denn, eur c'hoant ha ne oan ket dezañ - mond da graoñ-kel-
veza! Skrapet am-boa war ar hleuz a-benn kregi e-barz eur
skourr karget a vouchadou kraoñ. Diwar ar hleuz eo e welis
an ti.

Eun ti izel e oa. Ar vein-to a oa a-liou gand ar mogeriou
rouz. Gand eur wenjenn ez is beteg tre treuzou an nor, eun
nor bolzet frank gand mein benerez evel ma oa diouz an
daou brenest bihan e beb tu dezi.

Seul vui ma sellen outañ, seul anatoh e oa din am-boa gwe-
let an ti-ze kentoh. Ha me da lopa war an nor.

« Iwan! » Anavezet he-doa ahanon. Mamm va mignoned!
Daoust ma oa rouvennet he dremm, eun eston, e pare warni
c'hoaz ar memez karantez! Biskoaz eun heveleb karantez.
Her hinnig a ree ken brokuz, ken hegarad d'an neb a yee du-
ze. Din-me e oa bet roet ar garantez-se ivez.

Dal ma welis anezi e tiredas d'am zoñj eñvorennou fromuz
da heul anoïou he zri bugel - Fañch, an hini hena, Vefa ha
Rozenn, eur houblad gevezellezed, heñvel-vi an eil ouz eben,
war-bouez eur gleizenn a oa garanet tal Rozenn ganti.
Kouezet e oa bet war mên an oaled pa oa bihan. Bugale em-
zivad e oant pa ris anaoudegez ganto er skol-vamm. Morse
ne ouezis petra oa c'hoarvezet gand o zad. Pez 'zo, red e oa
bet d'ar vamm desevel anezo heh-unan. Hag evid-se e oa
eet da zevezourez.

Pa oa Emma - heh ano oa - mignonez d'am mamm-me e
vezen du-ze aliez ken evid c'hoari gand va mignoned ken
evid sikour pa veze ezomm. Nag a wech e oan bet o tenna
avalou-douar e-barz an tamm liorz stag ouz kein o fenn-ti.

Eun dra, avad, a oa chomet war va spered euz an amzer
euruz-se. Eun deiz, p'evedom on-pevar gand an dastum
pez-bihan, e oan eet da ziskuiz e disheol ar hleuz. Pe oad
e oam-ni d'ar houlz-se? Fañch, hag a oa bloaz kosoh evi-
don, a dlee beza pevarzeg, gand ma ouezfen. Azezet e oan-
me etre Rozenn hag eñ, ha, evel ma hoarveze ganin aliez,
e oa stag va zellou ouz ar gleizenn-ze a dreuze he zal. En
desped din e veze dalhmad sachet va evez war ar merk-se
peogwir e soñje din ne oa ar gleizenn nemed arouez splann
eur gouli kuzet e don he halon; e don he spered, pa lavar
mad.

« Da garedig eo? N'eo ket, Iwan? » eme Fañch, ken dicheg
ha tra. A-veh m'am-boe amzer da respont. Gand eur bleu-
kad e lakeas ahanon da goueza war Rozenn. Ruzia reas he
zal, hag e reas! Santoud a ris flourikadenn he bleo war va
jod. Dindan va muzellou e kavis stumm ar gleizenn. O, es-
tflamm! Eur gridienn a redas em horv. From pe spont? Piou
lavaro an trivliadennou a vez stravuillet kalon eur paotr bi-
han ganto? Pez 'zo, ne oan ket pell o skampa kuit gand ar
vez. Hag e klevis c'hoarz goapauz Fañch o tregerni er park.

Evelato, azaleg an deiz-se, ne greden ket selled ouz Ro-
zenn heb na zavfe ruzder d'am dioujod. Echu e oa amzer di-
drubuil va bugaleaj. Ha diwar an digouez-se e sellas Fañch
a-gorn ouzin, eur mousc'hoarz gantañ dalhmad war e vuzel-
lou, hag eun elfenn drefuuz e don e zaoulagad...

... Mond a ris tre en ti. Ne oa euz an traoñ nemed eur zal vraz, war-bouez eur speurenn o tispartia an daol diouz al lochenn vrasa fichet a-zoare gand daou wele-kloz. War an tu kleiz e oa deleziou ar zolier.

« Eur banne rouzig ha krampouez a yelo ganez, Iwan?»

« A galon laouen, moereb!» emezon-me. « Moereb » am-boa greet diouti a-viskoaz.

Ne oa ket peurgrog or merenn-enderv ganeom, pa glevis trouz o tond a-ziwar lae. Lavaret e vije bet evedo tud o vale, o redeg, o fihella er zolier. Chom a ris a-zav a-greiz va fred gand an diéz ma oan lakeet. Pa grogas an trouz-se adarre prestig goude, ne oa ket ar vaouez koz evid chom heb meiza va nehamant. Merzoud a ris penaoz e vousec'hoarzas, he daoulagad leun a deneridigez.

« 'Maint ket amañ, paotrig kêz,» emezi. « Eet eo pep hini 'neo doh e du!»

Hag hi da zisplega din petra oa en em gavet ganto.

Fañch a oa martolod er verdeadurez koñvers, o redeg dre ar bed war ar moriou. Vefa a oa dimezet hag o chom e kêr. Ral a wech e veze gwelet anezi tro du-ze...

« Daoust ha peleh bennag ema va mab, bremañ? Doue oar!»

Soubla reas he fenn, neuze, ha gweled a ris he daouarn o krena. Etre daou venoz e chomas a-raog distaga:

« Evid da Rozenn... Goud a rez e oa trelatet he spered tamm pe damm...»

Sténet e oen gand se. Penaoz am-bije merzet, pa oan paotr bihan, eun dra ken euzuz. Gwir eo, am-boa divinet evedo gloazet he boud, e giz pe hiz. Koulskoude...

« Kaset eo bet d'an ospital... Barrou spontuz a groge enni ken e oa red deom staga 'nei a-wechou.»

Ne oan ket evid gouzañv eur seurt kelou.

« He hleizenn 'ni oa kaoz doh an dra-he...» eme ar vamm. Ha ne oe ger ebed ken diwar he fenn da houde-ze.

Sevel a ris em zav evid mond kuit, goude beza sellet eur wech c'hoaz e kostez an deleziou. Ne glevis mann.

« Dre beseurt hent e rankan mond, moereb?» e houlennis.

« Rez ket bil! N'eus hent ebed nemed hini ar vuhez. Goud a rez, ne hell den cheñch penn d'an hent-se. Ne 'z eer ket war giz.»

Ha pa stagis endro gand va hantreadenn e ouezis e oa peurechu eun tamm euz va hlask, euz va imbourh.

HENT AR GOUELEDOU

O veza ma oa kuzet an ti, o veza n'am-boa esper ebed ken da weled e doenn hag e vogeriou o kinnig din bod, tommder ha karantez an annezidi, e oa kroget ennon an dizesper. Ha me da vond gand hent ar goueledou.

Daoust d'eur vouez-diabarz a gleven, evedon o vond dalhmad gand an diskenn. Daoust d'ar vouez a bede hag a aspede ahanon da glask eun hent all, da zelled ouz ar gorreou, evedon o vond dizehan war-zug an traoñ.

Gouzoud a reen am-bije kavet an tu da zevel m'am-bije troet kein ouz galv touelluz ar goueledou. Anez d'an dizesper a oa krignet va hreiz gantañ em-bije selaouet dioustu ar vouez a zave euz va diabarz. Ne oa ket treh d'am zoñjou du, allaz! Ha setu penaoz ez een gand hent en dihoanag.

Eun hent kleuz e oa. Striz, kamm-digamm, goloet a beb tu gand gwez kraboseg-oll, gwez chomet a-zav a-greiz o hresk, feson al lorgnez dezo, devet o deliou gand an avel biz o hweza dibaouez. Liou ar goañv oa gand an amzer ha gand an traou. Yen-sklas e oa deut dour an eienenn am-boa klas-ket eva diouti, ha gand-se e oa seh-kraz va horzaillenn. Gouez ha trist-kenañ e oa an tro-war-droiou evel pa vijent bet drastet gand ar gorventenn didruez. Pilgosou hanter bulluhet ne jome ken diouto nemed skourrou noaz hag heñvel e oant ouz eur hemend-all a gorrvou peurlosket gand eur barrad tan-kurun. Hag ez een, strebotet gand gwriziennou o tiskoacha euz a-douez an douar treud ha mein an hent. Kerzed a reen evel eul loen hualet, pennasket, skoet din eur boan hegasuz em hostez.

Divera ree doureier-sil lor ha kontammet, mastaret gand ar walenn griz he-doa greet he reuz dre eno.

Nozi ree bremañ. Ne gleven tra ken nemed eur voubou gasauz o krozal em dsikouarn. Daoust ha lamm va gwad an hini oa? Daoust ha mouez va houstiañs an hini oa? Neuze, peogwir e oan boaz d'henn ober, hag en desped din marteze, e savas eur bedenn diou va halon:

Aotrou, heñchit ahanon dre hent ho Polontez.

Aotrou, heñchit ahanon dre hentou kuz ho karantez.

O pellaad diouzoh emañ.
Dibabet am-eus an hent a gas da goll.
Selaouet am-eus kuzul an avel foll.
War bevonn an islonk emañ.
Neuze, Aotrou,
Stankit din arroudenn va hoantegez diroll
Evid ma 'z afen davedoh heb gouzoud din

en desped din....

Noz-teñval e oa. E-barz ar vro! Em askre, kerkoulz. An-kounah a houneze peb tra. Par a-walh e oa al leh ouz an ivern yen daoust d'an derzienn vraz a oa krog ennon. Hag ez een c'hoaz evel eur penn-ki. Morse ne oa bet ken trubuillet va boud gand kemend a zigenvez pa ne hellen ken selled ouz an hini a oa bet va Ambrouger.

Hogen, dre m'am-boa dibabet en em goll beteg tre strad ar goueledou hud, neuze e ranken mond di, dizarempred va e-ne.

A grede din diantao. Rag, ne oa ket peurechu ar zoñj-ze ganin p'am-boa klevet trouz kammejou o heulia ahanon. Da genta e soñje din penaoz ne oa euz an trouz-se nemed hekleo va hammejou-me o tasseni war an douar kaled. Chomet e oan a-zav meur a wech ha paouezet en-oa an trouz. Evelkent, pa oan eet da lakaad eun azez e goudor ar hleuz, setu ma kleven pouez ponner treid o ruza e-touez ar brug hag al lann a-dreñv d'am hein. Kavoud a ree din, zoken, kleved skrign-dent evel pa vije bet unan o taskiriad. Nebeud-ha-nebeud, n'eo ket chaokad boued eo a gleven - unan ben-nag o trailla pozioù etre e jik hag e jouk, ne lavaran ket. Hag ar homzou a deue gantañ a oa diouto gerioù ken euzuz, ken spontuz ma n'on ket evid o dezrevella amañ. Gouzoud a reen ne jome ken nemed eur hammed a-raog an islonk am-boa dibabet mond etrezeg ennañ, hag e vije echu ganin...

Keuz ha kerse eo e oen saveteet ganto. Keuz d'am emgarantez, keuz d'am buhez digar. Med ive, kerse d'am mignoned ha d'am zud. Kerse d'an Hini evedon ken pell dioutañ. Gwalhet e oe va doan gand an daelou skuillet ganin a-buill. Eet e oan da hourvez evel eul loen fêz.

Pa oe tarz an deiz e skede ennon eun elfenn nevez.
Tomm e oa an heol.

HENT AR GORREOU

Digohenn e oa an amzer. Laouen e pare an heol war ar vro renevezet. Ken laouen all e oan-me pa stagis da zavel gand ar grapenn. Petra bennag a hoarvezfe, em-boa a-benn ar fin, adkavet ar peoh. Ousenn-ze. e ouien ervad evedon tost da gaoud ar pez a glaskan a-goz.

Treuzi an oabl a ree bommou-nij hag o heulia reen an hurra ma hellen. Eur han nevez a vouskanen da rei lusk d'am bale skañv.

War-zu va fal e kerzan laouen
Ha va huñvre a darzo a-grenn.
Petra gavin e penn an hent nevez-se?
Petra leunio va halon dizehet a-bell 'zo?
Petra welin en eur vro dizano?
Tridal a ran o hortoz ar houlz-se.

War-zug an esper ez an dalhmad.
War-zug ar peoh a glaskan
Petra hortozan pa lamm va gwad em askre?
Petra hedan e tro an hent, war gorre?
Gorre ar menez? Karantez, tamn pe damn?
Petra roio din levenez?
Tridal a ran, mall ganin d'ar mare-ze.

Trubuillou an noa kent o-doa brevet va horv ha va spered. Badaouet e oan c'hoaz; daoust da ze e teue din a-nebeudou eur startijenn ha ne oan ket boaz outi, eun nerz hag a lakee ahanon da vale dineh ha dizamant war an hent serz-se.

Eur wech, memestra, e rankis chom harp ouz unan euz ar mogerioù mein a oa bevennet ar parkeier ganto. Ne oa ket gand ar skuizder an hini oa. Gand an talma a ree va gwazied, ne lavaran ket. Daoust ha dellezeg e oan a vond pelloc'h? Hag adarre e rodellen em fenn envorennou amspiz an devezioù digar. Tremen a ree dirag daoulagad va memor skeudennou morenneg va mignoned, pa gorollem er prajou a-greiz or c'hoarzagou, or hanou, gwisket ganeom dillad espar an douar, kurunennet or pennou gand deil an ollved, dizeblant-kaer ouz an amzer-da-zond. O, treantusad devezioù or bu-galeaj! Dasseni ree c'hoaz sonerez entanuz ar predadou a

live re-abred eur bed a oa tonket din anavezoud deiz pe zeiz. Rag-se e oan chomet a-zav. Daoust ha kalon a-walh am-bije da zevel ha da zevel c'hoaz pa oa ken brao din maga envorennou?

Ha sac'het e oan da vad? Bez' a-walh...

Neuze e paras va zellou war eur gaerell. Stag e oa he daou-lagad lufuz ouz an estrañjour a oa ahanon er vro-ze. Stumm mistr ar horvig, ken flour e liou, e oan sabatuet gantañ. Ha dre ma vamen dirag kened al loenig e kredas din kompren penaoz e ranken mond pelloc'h c'hoaz da gaoud ar gened heh-unan...

... Tizet eo ganin lein ar menez. Deuet eo ar houlz da ana-vezoud ar Wirionez.

A-greiz oll ez on dallet gand eur sklerijenn vraz. Hag er sklerijenn-ze a red dre va horv ez on seizet gand eur boan dreist-lavar. Elevez a grog ennon pa verzan emañ en noaz-ran evel pa vije bet devet va dillad gand an tan o skedi diouz ar sklerijenn. Ne gredan na selled, na fiñval, na distaga grig ebed.

Dres p'ema va foan en he gwasa, setu ma hellan digeri va daoulagad. Berr-tre eo bet ar barrad am-eus bet da houzañv, rag, en eun taol krenn, eo gounezet ha karget va boud gand eun dousder hag eun deneridigez heb o far.

Dirazon en em led ehonder ar Mor...

Aze, e traoñ an tevenn, emañ ar Vag ouz va gortoz. Gouelia rin heb dale pell, a-raog ma stago da nozi. Ha dasked an Heol war ar Mor divent an hini 'vo va Hent etrezeg eur vuhez all...

KRISTIAN BRISSON

Eil priz **Per Trepos**, 1980.

YANN ar BURZUDOU

war e dorchenn

WAR-DU AR GONCHENNERIEN

Setu eun hanter-kantved ha muioh abaoe ma selaouan ar goñ-chennerien gand eur blijadur purroh-purra dre ma 'z an war gosaad. Dre ma 'z eont kuit ivez an eil war-lerh egile, o kas ganto ar rolliou hag ar reolennoù amprout e-pad remziadoù. Ar vuhez-hirio, hag en em vezv a-walh gand cholori ha safar, n'he-deus truez ebed e-keñver tud a gemer o amzer da gôzeal. Truez ebed kennebeud e-keñver ar re a gelenn ar skiant-prenet hag a lez gand ar re all diougan an amezur da zond, o terhel ganto al levenez da vlasaad an deiz en e roud hag envorennou an derhent war eun dro.

Eur hoñchener, e gwir, n'eus ket outañ hebken an hini a gas ar hoñchennou. Bez eo da genta an hini a gav anezo, a zo skoet gand an awen e leh ma ne wel ar re all nemed darvoudigoù pa welont eun dra bennag, an hini a zo kad da drei e danevell veur an disterra digouez, eur barz 'ta, eun den a faltazi ha ne houzañv ket beza touellet gand diavêz an traou, ne gemer ket gwir an traou-ze evid arhant dioustu. Eun den dichaluz 'ni eo, gouest da hortoz e-pad miziou e kemerfe ar goñchenn he horv a-raog teurel anezi er-mêz. Meur a wech, e-pad ma oan war glask, e-neus lavaret din an eil pe egile: « Deuit endro ar bloaz a zeu, marteze 'm-bo eun nevez ». Ha pa hoarveze ganin peurechui evid gouzoud an danvez d'an ne-beuta, e veze respontet din: « N'ouzon ket c'hoaz. Re a louzeier fall a zo endro dezi ».

Ar goñchennerien 'm-eus selaouet, nemed unanig bennag, e oa outo tud dija war an oad. A-raog konta e rankit lezel da vernia ennoh eost evezadegou hir, dilavet warno o-unan gand an amzer, a-hend-all n'ez eot ket dreist an danevellig, a-boan ma viot mad da blijaduri ar hontouariou ha da zidua ar frikoio. Ar skiant-prenet, hervez lavar eur hoñchenner din, a ra kig d'ar goñchenn. Ouspenn-ze ne hell talvezoud nemed d'an dra-ze. Staga reer da gonta etre daou-ugent hag hanter-kant vloaz. Re abred eo a-raog, ar fiziañs a ra diouer, ne gredfer ket boda tud d'o boueta gand treuderez. Re ziwezad eo goude-ze dre ma ranker poelladi pell evid dond mailh a-walh da dizoud eun hinonder ma ne ra ket ar goñchenn heh efed penn-da-benn hebti. Bez' e ranker gouzoud ivez herzel er mare mad. Teurel eur goñchenn er-mêz a zo diêz-tre. Red eo chom bepred war evez, spial penaoz e sko ho komzou war ar zelaouerien, derhel anezo war veg ho teod. Hag eur hoñchenner re goz en em lak war var da zrailla kôziou, ar gwasa diskar evitañ. Meur a wech ez eus bet roet keal din euz tud a oa bet brudet evel koñchennerien gaer, nemed ne oant ket bet klever ken o konta abaoe eur boutadig. Pa 'z een daveto, int a ree din brao da gleved e teuen re ziwezad, e oa dizoñjet ganto, eet o feunteun d'an hesk, pe ne oant ket evid teurel eur goñchenn e aore abalamour da wanderiou an oad: « N'on ket mui yah a-walh, eul labour fall a rafen. Kerzit da glask eun all bennag ». - Med piou? N'eus mui den hag a oar - Neuze eo tremenet warnom amzer ar hoñchennou ».

Biskoaz n'em-eus kavet koñchenner ebed e-touez ar re binvidig. Ne fell ket din divenn n'eus ket bet outo. Kredi a ra din, avad, beza klevet e ranked beza dizalhet a-walh diouz madou ar bed-mañ evid konta. Diêz an dra pa 'z eur perhenn. Ar preder e-keñver ar pezh a zo deoh a vir ouz ho spered d'en em domma ouz ar pezh a zo d'an oll ha ne goust netra. Ar hoñchenner a gemer e vad e leh ma kav an ti heb ober noaz ouz den. Seul vuioh emañ en e frank ha seul welloh e kont. N'e-neus ezomm nemed a vara. En amzer dremenet, kontet e-neus aliez evid e vara. Bez' e veze klasker-bara, baleer-bro, pirhirin galloudeget, aliez a-walh heb tan na toenn, da lavared heb fun na peul. Forz penaoz, red e oa dezañ beza e-unan-penn evid sevel e draou. Arvest an dud a zo hadenn ar goñchenn, homañ ne hell bleunia, avad, nemed en dizarempred. Chañsuz a-walh on bet-me da gaoud daou dad-koz koñchennerien e doareou disheñvel. An eil a bleustre war e goñchennou en eur ober bouteier, e gi Vaouig o talvezoud dezañ da zelaouer, egile en eur zrailla mein war gostez an henchou braz ha trouz e vaill a lavare dezañ ya pe nann. O-unan-penn o-daou. Eun all a oa staget d'en em gonta koñchennou abalamour e oa klezard. Evel-se, o veza ne helle ket en em lakaad war renk ar vederien all, e oa rediet d'ober diviz gand e dog. Med pebez koñchenner oa outañ pa ne oa ket dao dezañ ober gand ar falz!

AL LABOUR KONCHENNA

Gwella gopr ar hoñchenner, ar goñchenn heh-unan 'ni eo. Ha souezet oh? Aketuz eo penn-da-benn ar gonider da labourad an douar hag an ed a zeu dioutañ, kaoud a ra gand gwir beza greet anezañ. Ar hoñchenner ez eus outañ liorz ar goñchenn hag e liorz er war eun dro. Kement a blijadur e-neus da zistaga ar goñchenn hag ar gonider da chaokad bara e ed. Perhenn ma n'eo war netra all, ar goñchenn a dalvez dezañ da zalh ha d'eost, koulz lavared da verk euz e renk er genseurtiez. Aliez em-eus taolet evez en dudi dreist a ziskoueze ar re wella outo pa oant da vad o konta dirag selaouidi. Blasata reent ha lipad o ijinou hag o homzou e-pad ma labouront da gêzeal gwella ma hellent evid kas da benn ar goñchenn o vond war-raog. Hag etre diou frazenn, rag mond a reent goustadig ganti, e pakent o levezet diwar zanvez ar peoh endro dezo, a ziskoueze e labouront mad. Furlukinez ebed ganto, avad, ne daolent ket eur zell war an estlammerien, war o daouarn pe an tan ne lavaran ket. Echu ganto, ne oa stlakadeg ebed, an traou-ze ne oant ket anavezet. Huanadennou ya, pibennou yen o skarza ouz bouteier, friou o skarza e mouchoerou hag o-nije ket kredet en em skarza abretoh, mouez mestr an ti o kloza an abadenn: deut eo ganeoh! hag asantadenn ar re all. Bez' e oa red eur hard eur bennag a-raog d'ar zaliad kredi dond adarre d'an dalh kustum.

Beilladeg ar hoñchennou a oa eun arvest hag eul lid war eun dro. C'hoant em-eus bet, eur wech, da zelaou eur hoñchenner en eur park e leh ma tiwalle e zaout, azezet harp ouz eur hleuz: « Ober a rin eun esa a volonte vad, emezañ, abalamour eo brao an amzer ha sioul al loened, med ma teufe an avel da zével ne hellfen ket. Perag n'oh ket c'hwi deut deh d'abardaez? »

E gwir, ar hoñchennou a veze dibunet d'an noz, eur wech echu al labouriou ha dieubet an dud penn-kil-ha-troad. Ne veze ket kontet e-pad an eost ruz, pep hini o veza re skuiz, na da vare an hada, re ziêz evel ma veze o fenn gand ar gouerien. An diskar-amzer hag ar goañv, avad, a wele bodadegou e ti an eil pe egile goude koan. Mistri ar feurmou braz, dreist-oll, a gare pedi tud o hompagnunez, goude asur dezo kaoud eur hoñchenner brudet dindan mantell o ziminal. Ar hoñchenner-ze, kement ha ma ouzou, ne veze ket peët gand arhant vil. Distrei a ree d'ar gêr, paour-kêz den ma oa, gand eun dorz deg lur vara, eur jelkenn gig sall, eun tamm amann fresk, eun dousenn viou skoulmet en eur mouchoer. Eun bennag euz

ar vro e oa outañ peurvuia. Bez' en em gave ivez pillaouerien euz Menez Are a ziskenne e Kerne gand marh ha karr da zastum pillou ar vro e oa outañ peurvuia. Bez' en em gave ivez pillaouerien euz Menez Are a ziskenne e Kerne gand marh ha karr da zastum pillou ha krehin. Boazet da gemer karter en eur feurm, dalhmad ar memez hini, ha pèa reent o ojeiz gand koñchennou ma oa ganto eur rastellad outo en o zah rouz. Em oad a grennard, selaouet 'm-eus eun euz ar re-ze e-neus fromet ahanon don. Eur born euz Brenniliz oa hennez. Diwezatoh em-eus greet ma zeiz posubl d'adalavared war ar skingomz ar hoñchennou 'm-boa klevet digantañ e brezoneg. Komzet 'm-eus gand doujañs diwarnañ evel pa vije bet tremenet, dre ma tiskoueze din beza koz a-walh dija pa deue du-mañ ugent vloaz a-raog. Hogen, beo oa c'hoaz dre hras Doue ha klevet e-neus ahanon. Daoust ha ma oa war e leve, diskennet eo a-ratoz kaer beteg ti ma zud e Pouldruzig: « Lavarit d'ho mab emon sonn c'hoaz war ma hillorou. Bez' ez eus eun draig bennag a jom gantañ da zeski. Ra zeuio d'am gweled hag e lavarinn dezañ peb tra ». Siwaz din, n'em-eus ket kavet tro da vond davetañ abred a-walh. Ne vin morse nemed eun deskard.

MOJENNOU HA KONCHENNOU

Arabad kredi e tibune atao ar goñchenn war an ton grevuz, e veze kôz enni euz maroiou, tasmantou, beajou d'ar Bed All, kêriou liñvet, darvoudou dreist-natur, gwall-daoliou lieskementet er pennou. Kontet e veze, gwir eo, mojennou koz a zelle ouz lehiou tost, ana-vezet gand an oll, dres ar mojennou a gaver e dastumadennou ar hantved diweza. Hogen, em yaouankiz din-me dija, er Vro-Vigou-hantved diweza. Hogen, em yaouankiz din-me dija, e oant o vond da goll. Evid ober gand ar geriou mad, eet oant er-mêz a hiz, er Vro-Vigoudenn d'an nebeuta. Setu n'em-eus klevet biskoaz nemed koz-tammou ouz mojenn vrudet Kêr-Iz, ma lakeer anezi da genta e pleg-mor Douarnenez pe e Beg ar Raz, kichenn-tre euz ma bro hinidig. Damveneget e veze e-giz eun dra goz-goz, damanavezet gand an oll ha ma ne dalveze ket he digas er gôz. Nemed roet e veze da wir penaoz marh roue Iz, goude liñvadenn ar gêr, e-noa taolet e droad war an douar seh en or parrez Pouldruzig, e leh ma oa da weled c'hoaz merk e gam war eur pezh tamm mên.

A-hend-all, ar vojenn a ziskoueze warni. kalz pe nebeud, mamm ar vriz-kredenn, ha padal ar goñchenn reiz en em ginnige en doare ma ne veze ket posubl ken da gemer anezi nemed evid eun danevell ijinet. Ar vojenn a ree, evid ar penn-rollou, gand tud-veur, roueed,

prînsed, sent, roñfled hag all, ha padal pennou ar goñchenn e oa outo mibien kouerien a zouge aliez an ano a Yann (Yann e Vaz Houarn, Yann Zeiteg, Yann ha Chann), ganto eun dro-spered a glote mad-tre gand hini ar zelaouerien. Pa gonte ma zad-koz ar boutaouer « Penaoz e teuas eur Breizad da veza roue e Bro-Zaoz », an dud vad a oa aze a zizoñje diouz o stad reuzeudig en eur vond a-dennadou d'aloubi ar vro-ze da heul unan outo, heñvel outo, o mab pe o breur. A-hend-all, bez' emon c'hoaz o klask gouzoud hag-eñ unan bennag eur ar hoñchennou 'm-eus klevet n'eus ket outo, kemmet brao evid an dud a-ziwar ar mêz, troiou-chañs an Daol-Grenn, c'hoariet gwechall gand marhegeien feal. Eun abeg mad bennag azo din da gredi kement-se.

Ma vefe red groñs dispartia ar vojenn diouz ar goñchenn, divenn a rafen e sell ar vojenn ouz eun darvoud **nemetañ**, chomet displann en eñvor, hag a zo tremenet en eul leh spiseet, ha padal ar goñchenn a ziskouez eur penn-den paket en eun heuliad digouezadennou, pe a zispleg ar memez danvez a-dreuz eun niver a varvaillou lakeet war anioiu tud a beb seurt. Setu perag en em gav gwelloc'h ar hoñchenn en e vleud gand eur goñchenn reiz, frankoh an doare outi, a ra tu dezañ d'ijina gand e benn e-unan hag an aotre da renevezi an danvez evid dedenna stratoh. Ha setu ivez perag em-taolet evez dalhmad e vourre gwelloc'h an dud gand ar hoñchennou eged gand ar mojennou hervez an termenadur kinniget ganin uhelloc'h. Meur a vloavez a zo bet red din a-raog lakaad da zond er-mêz euz ar pennou mojenn pe vojenn, goude me eet war glask outo diwar eur frazenn nemeti, riklet diwar deod eur hembrezege ha ne ouie tra muioh. Bewech p'eo digouezet ganin paka eur vojenn war eun taol, ar hoñchenn e-unan e-noa paket anezi digand eun bennag hag e oa bet kavet ar vojenn-ze gantañ en eul leor.

Hogen, enklask kerseüz ar mojennou e leh ma oa bet eun testeni outo a dalveze din da zastum, diboan kaer, koñchennou dispar ma ne bade ket an dud vad heb ober o zeiz gwella evid o dibuna din en eur lavared: « Setu aze d'an nebeuta eur marvaill da lakaad en ho sah. N'ho-po ket kollet ho amzer penn-da-benn ». Hogen, dre ma ya an amzer en e roud, dond a ran da gredi muioh-muia ez eus gwelloc'h pouez er hoñchennou-ze eged en oll mojennou ar bed. Ar hoñchenn en em ziskouez enno penn-kil-ha-troad, a ziskouez e goskor war eun dro, eur zevenadurez a ziguz evidoh gand komzou eun ha didro. Ha pa 'z eo ar zevenadurez-se hoh hini deoh, ganeoh 'hoh-unan e teskit d'ober anaoudegez. Fromuz an dra.

Per-Jakez HELIAS

Kavet e vo ar skrid galleg e-barz **Les autres et les miens.**

**PAOTR TREOURE
MOJENNOU**

Skeudennou gand

Joël-Jim Sevellec

20 lur (200 g)

**TAD MEDAR
AN TRI AOTROU**

Ar gwella leor abaoe **EMGANN KERIDU**
50 lur (400 g)

**Tad Medar
Diwar c'hoarzin**

Skeudennou gand **Langleiz**
30 lur (250 g)

**Per-Jakez HELIAS
AN TREMEN BUHEZ
LE PASSE-VIE**

Barzonegou
40 lur (400g)

PLADENNOU

HEOL GLAZ AN TRI YANN

Tost da dri bloaz 'zo e oa deuet ar bladenn « **Urba** » er-mêz gand ar **Tri Yann**. Lavared a ra lod e teu o flanedenn nevez « **An heol a zo glaz** », pemp bloaz re ziwezad, ablamour n'eo ket ken ar « progressive folk » diouz ar hi, sañset. Ne gav ket din koulskoude e vefe gwir: a-leiz a dud a zo eet da zelaou anezo kement e Breiz hag e Pariz, er miziou tremenet.

Muioc'h a blas e-neus ar brezoneg en taol-mañ, peogwir ez eus eun tu e brezoneg penn-da-benn, memez ma n'eo ket disi atao. E keñver muzik, eo eul labour a-zoare, eul labour greet gand tud a vicher. Lavared a rin da genta ar pezh a blij din.

Ar pezh a zo a bouez, ez int muzisianed ampart. Son a reont mad war e-leiz a vinviji sone-rez: binviji kerden, evel ar psalterion, binviji-avel evel ar vombard-izel hag ar hromorn, estreded ar binviji a vez klevet gand kement strollad kazimant.

C'hweh ton o-deus savet, ha lod anezo a zo plijuz: ouspenn kempenn toniou koz a reont bremañ. El lodenn brezoneg zo tammou liestoniet brao: diêz e tie beza kana an tamm kempennet e « canon », 'barz « **Kan an Heol** »; aze, a gav din, ez eont war-raog eun tamm mad e-keñver kan. Komzou c'hweh kanaouenn a zo bet savet ganto ivez, peder e galleg (blaz ar galleg koz warno, pe e gallo), ha diou e brezoneg. An hini wella eo sur a-walh « **Si mort à mors** », war eun ton iwerzoneg. Med n'eo ket fall kennebeud an heuliad bet savet ganto diwar livadurioù eur japel vrudet euz Plouha, hini Kervaria an Iskuit. Deuet int a-benn da zevl eur zonerez vrazo gand blaz ar Grennamzer warni.

War an eil tu, neuze, n'eus nemed eun heuliad toniou, o tenna an oll anezo da emgann tud Plogoñ a-eneb ar greizenn nukleel. Deuet eo a-benn an **Tri Yann** amañ da zehel beo on interez penn-da-benn en eur implij eun ton brudet euz ar « **Barzaz Breiz** », ton « **Gwin ar Hallaoued** », evid liamma an toniou all an eil gand egile. War an tu-ze a gav din e kaver ar brava toniou and « **Mort à mors** » war an tu all.

Med traou 'zo ne blijont ket din. Eet on skuiz gand ar stumm kanaouennou « **au jardin de mon père les lilas sont fanés** », daoust ma n'on ket gouest da lavared reziz ablamour da betra.

faziou a zo 'barz ar hanaouennou brezoneg bet skrivet gand ar **Tri Yann**. Setu ne gomprenet ket frazennoù evel: « gwell eo stourm nevez na mez », bet skrivet war batrom « **Gwin ar Hallaoued** », pe « kan ar kann » e-leh « **kan ar hann** ». Ne zistagont ket mad ar brezoneg atao ivez: plaset fall eo ar pouez-mouez a-wechou: « difantadeg, an dadenn ». Ne reont ket an diforh etre ar zoniou hir hag ar zoniou berr, setu ne gomprenet ket « **kan ar hann** » (kana n'eo ket kann...!).

En ton anvet « **Dañs nevez** », a zo e gwirionez eur gavotenn, e kav din eo re ingal ha re zimpl al lusk: ne vez ket klevet amañ startijenn soutil ar ganerien kan ha diskan ampart. Domaj eo, kar posubl e vefe bet dezo deski ze.

Va zantimant: dre vraz ez eo eur bladenn plijuz da zelaou, labour greet mad e-keñver muzik hag ar pozioù galleg. E-keñver brezoneg avad, e vije bet moyenn d'ober gwelloc'h pe en eur zeski gwelloc'h ar yez, pe en eur glask skoazell unan bennag.

J. Goyat.

FILMOU

ENERGIEZIOU BRO-DANMARK

Setu amañ ar henta film bet doublet e brezoneg diwar eur yez all, a gav din da nebeuta. Greet eo bet al labour gand **Andreo Goallic** hag e gamaraded euz « **Skol an Emsav** » Kerne ha diskouez a reer ennañ ement tra a glasker ober e bro an Danmark e-keñver energieziou nevez. War a zeblant he-deus tapet ar vro-ze eun tamm lañs war ar re all, evid pez a zell an daspugnerezad-heol, ar gaz-teil, ha dreist-oll ar rojou-avel, hag a zo 2 000 anezo da veza lakeet e plas e-kerz an 10 vloaz da zond, da rei a-benn neuze 10% euz an elitrisite a vo devet er vro.

Kenteliuz ha dedennuz eo ar film e meur a geñver: gweled a reer penaoz e vez tud, a-unanou pe a-vodadou, o klask diskoulma ar gudenn gwall-ziez a zo eur hini an energiez. Du-hont ivez ez eus tud diskredig e-keñver an energieziou nevez, hag unan a glever er film, med greduz ken ha ken eo ar re a zo a-du: 80 % euz an domnder e-neus ezomm en e di a zoñj unan kaoud dre an daspugnerezad-heol. Ar pez a vank er film evelkent, eo an evezadennoù resiz war ar pez a goust an eil stumm hag egile a energieziou nevez, dreist-oll p'eo taoliou-ésé eo emañ oh ober, med diéz e oa moravad renta kement-mañ en eur film-testni evel ésé eo emañ oh ober, med diéz e oa moarvad renta kement-mañ en eur film-testeni evel hemañ.

Ar pez a gaver fonnuz e-barz avad, ha penn-da-benn, eo enebiez e-keñver an nukleer, med n'eo ket dihortoz kement-mañ a-dra-zur: ar re a vez eneb an nukleer eo a vez a-du gand an energieziou nevez. Med notenni a vo greet ouspenn an enebiez kaled a-walh ivez, penn-da-benn, e-keñver an dud e karg hag ar re a zo bet anvet pe dilennet. Hag an tele, ne ra, evel just, nemed konta gevier. A-hend-all, eo anad eo bet troet ar film en Danmark: gweled a reer eno kooperativou bet savet er hêriou gand ar re a vez o loja en tiez braz, e a zo eet da jom e lojeiz dilezet...

Eur film testeni eo hemañ, ha n'eus ket ennañ a hoarerien, med testou o displega o zoñj. Esoh a ze moarvad eo bet ober al labour-doubla e brezoneg. Implijet ez eus bet meur a vouez, dre ma oa bewech tud disheñvel o komz, gwazed pe maouezed. Klasket a zo bet ivez kaoud an ton a zere ouz ar seurt divizou, hag aliez ne deu ket fall. A-wechou, koulskoude, e klevet mouez eur plah, da skwer, ha ne zeblant ket beza brezonegerez a-zoare, ha neuze ne deu ket hi a-benn da gaoud an ton a zo dileet.

Ne vo ket taolet kont euz ar faziou distagadur pe yez (da skwer, pouez-mouez war « e » er ger « ebed », « o zamm zi » e-leh « o zamm ti »). Greet zo bet gand gerioù nebeud anavezet, evel « eoul-mên », e-leh « petrol », med evel war ar radio brezoneg, e vez greet a-wechou gand daou her, da skwer « jedoniezh » ha « matematikou ». Med daoust ha ne vije ket bet dileet skriva ivez: « an energieziou e bro an Danmark » e-leh an titl a zo bet dalhet?

A-benn ar fin, daoust pegen teknik eo ar film - ha bez' e hellje beza bet kement-mañ eur skoill e-keñver yez - eo deuet mad a-walh, ha n'eo ket dispiluz da weled. E-keñver danvez, evel just, eo da bep hini da varn hervez e venozioù, dreist-oll en eur mare ma 'z eo ken disheñvel ar menoziou war ar hudennou energiez, amañ e Breiz. Med daoust hag e vo kalz a dud o vond da weled ar film?

F.B.

LENNADENNOU

AR HELAOUENNOU: Mare an diêzterioù.

Dalhmad dirag an dud a ziaevêz, e vez komzet euz ar helaoüennoù hag a vez moulet « niveruz » e brezoneg. Euz ar skridoù « niverusoh-niverusa » a vez lakeet da zond er-mêz. Hag euz an embannadurioù hag a vez lennet gand « muioh-mui » a dud.

Arabad huñvreal. An neb a hoantafe lenn brezoneg nemetken a vefe aliez meur a zevez, ha meur a zizunvez a-wechou, heb kaoud seurt ebed a nevez da lenn. Well-waz, war eur bloavez, n'e-nefe ket e 20 pajennad bemdeiz da lonka: eur pennad 'zo on-eus diskouezet kement-mañ dija (1). Ar beurrasa euz al leorioù brezoneg a vez lakeet da zond er-mêz a heller lenn anezo en eun nozvez, etre koan ha mond da gousked. Hervez ar honchou nevesa (2), n'eus ket muioh evid 300 pe 400 a dud evid prena al leorioù nevez ar bloavez kenta ma lakeet e gwerz.

Evid pez a zell ar helaoüennoù, n'heller ket lavared ez aje peurvad an traoù ganto abaoe eur pennad. Heb komz euz ar re ne vez warno nemed eur bajennad bennag a vrezoneg, evel **AR FALZ** (ha ne vez ket moulet ken, med liesskrivet), heb komz euz ar re a zo marvet eun nebeud bloaveziou 'zo dija evel **Barr-Heol**, n'eus nemed gweled petra hoarvez eun nebeud mizioù 'zo:

- evid eur pennad, sañset, eo chomet **Dihun** a-zao (ar 4 bajenn vrezoneg a veze beb miz e **Breizh**, kazetenn **Kendalc'h**.)

- **Evid ar Brezhoneg**, ar gazetenn bet lañset gand C. Henry evid klask deski d'ar vrezonegerien lenn o yez, pa ha niver he houmananterien war zigreski (euz 5 000 eur mare zo bet, eo en em gavet da 2 000), ne hell dond er-mêz nemed eur wech ar miz ken, e-leh beb pemzekteiz.

- **Pobl Vreizh**, kazetenn vrezoneg an U.D.B., eo beb eil miz e vez-hi embannet diwar vremañ, ha n'eo ket beb miz ken evel abaoe ousspenn 10 vloaz, mizieg ma oa abaoe he henta niverenn.

- war-leh e vez meur a gelaouenn all o tond er-mêz: **Bremañ** (kazetenn nevez **Skol an Emsav**), **Al Lanv**, ha... **Brud Nevez**.

Ar re memez hag a zeblant an traou mond mad ganto, a vez war goll... Perag kemend all a zîesteriou? Euz ar henta gwelet, ar pezh a vank d'ar hazetennou ha d'ar helaouennou brezoneg, an oll anezho, n'eo ket kement-se tud da skriva enno: se a zo. Med aliez e vez re nebeud oh ober war o zro, hag e vank dezo an arhant. Ha mankou da ra dezo an arhant, pa n'o-deus ket tra-walh a lennerien. Ha pa n'o-deus ket tra-walh a lennerien, ne vezont ket skoazellet a-walh.

Marteze avad, e vije mad klask eun tamm pelloh ivez. Tro on-eus bet da ziskouez dija dre statistikou (1) eo lennegezh a vez kinniget da lenn evid ar muia er helaouennou brezoneg. Ha dija e houlennezh daoust hag en eur ober ze, e kinniger d'an danvez lennerien ar pezh emaint en gortoz da gaoud. Diêz a-walh kaoud ar respont: en em zoñjal a vije mad ober bepred.

F.B.

(1) Gweled ouz **Brud Nevez**, nn 26.

(2) gweled unan euz diweza niverennou **Al Liamm**.

AR REPU DIWEZA

**Ne guzin mui e don ar hoad:
ar gwez a zo trohet.**

**Ne valein mui war ribl ar stêr:
an dour a zo saotret.**

**Ne bignin mui war mein ar roz:
an roh a zo freuzet.**

**Peleh mond neuze pa ne dro ket ar bed 'vel ma karan.
Ha pa laka tro-ha-tro ar garantez hag ar jagrin
an dizurz em halon?**

**Chom a ra ganin c'hoaz an hentig don diweza,
A-uz d'am fenn bloz fresk an dero
e leh m'en em goll ma zoñjou,
Ha chilaou ' ran, e hiboud an avel, e richan an evned,
kuziadennou ar gwez koz.**

**Rambreal ' ran, padal kousked ne ran ket!
Troet eo ma daoulagad war-zu ma huñvreou,
Med sellit mad ouz ma dorn,
- eur hreunadenn ' zo ennañ.**

**Arabad êsea gwasta ma goudor!
Paneved-se e lakain ar bed da straka,
hag e tarzo
hag e steuzio
en eur gouel a dan hag a euz**

ma jardin diweza.

H. GAUDART.

Penaoz kompren neuze ne vije ket taolet kement-se a evez euz al labour a reom hag e chomfe meur a hini dizeblant e-keñver **Brud Nevez**? Bez' ez eus zoken tud ha ne fell ket dezo en em renta kont euz ol labour, hag o-deus a-wechou beteg disprizañs evid or helaouenn. O follennata an 50 niverenn on-eus lakeet da zond er-mêz war bemp bloaz, e welfe koulskoude neb piou a zo a volonteze vad n'eo ket dister ar pezh ah embann **Brud Nevez**.

Estreged ar poenchou mad a zo memestra. Evid pezh a zell ar goumananterien, pa gomzem anezo, n'eo ket bet ken kresket an niver anezo ha m'on-ije bet ezomm; deuz an tu-ze, ez eus moarvad eun tamm mad d'ober c'hoaz da rei gwelloc'h ar gelaouenn d'anaoud. Ahend-all, n'om ket bet deuet a-benn bepred d'ober euz **Brud Nevez** ar pezh on-nije bet karet: meur a wech eo on-eus huñvreet e traou all d'ober hag e skridou all d'embann.

Tamm ha tamm marteze e teuy an huñvreoù da wir. An 50ved niverenn-mañ eo ivez ar henta ha kant euz **Brud**, hag a oa bet deuet an niverenn genta anezi er-mêz en hañv 1957. Bet zo bet greet eun tennad mad a hent abaoe. Gand fiziñs ha pennegezh e hellim derhel gantañ, gand skoazell or houmananterien, ol lennerien hag or henlabourerien ivez.

J.S.

D'an 30 a viz genver 1982

M'eo bet berr-tre respont Jord Fillioud, ken frêz all eo bet: dileet eo da yezou Bro-Hall beza klevet war ar skingomz hag ar skinwel. Ha roet vo ezo ar gwir-ze, hervez m'eo bet lavaret-groñs gand ar Ministr. « **Bez' e vo unan euz kevridiou pouezusa an aozadurioù digreizennet da zond da rei o ichou ha skigna yezou ha sevenadurioù ar rannvroioù** ». Sed eno eur ouestladenn par da hini Alan Savary o tisplega eo kelenn ar yezou ha sevenadurioù-ze unan euz uhel-mennadoù e garg a vistr.

Dambar hepken an diou bromesa. avad, eun diforh a-bouez etrezo: m'e-neus kemennet ministr an Deskadurezh e vo divizet gantañ reolennoù nevez a-benn eun nebeud mizioù, ministr ar Hemenn, eñ, ne gomz euz lakaad seveni e venozioù nemed a-benn ma vo diazezet da vad « aozadurioù-rannvro » ha n'eo ket bet termenet evid c'hoaz ar pezh e vint. Evid gwir an organadurioù-mañ ne hellint ket krogi da vond war-raog nemed e troioù hanter 1983, d'an abreta. Daoust hag ahann di ne vo kemmet tra en doare kasauz ha mezuz a vez implijet gand ar Radio-T.V. e-keñver or yezou? Daoust hag e vo ranket gortoz eur bloaveziad all... pe vuioh? Daoust ha ne vo krouet abadenñ ebed er broioù ma n'eus ket diouto? Nag hirraet padelez ha kresket niver an abadennoù berr o vond endro er broioù all?

Hag amañ, e Breiz, ha dalhet e vo d'on abadennoù brezoneg ar mareoù-amzer ken striz o-deus bremañ, gand eurveziou ken divalo dezo hag evito yalhadoù skragh d'o zevel?

Adal **penn kenta 1982** eo e tle beza divizet ar cheñchamañchoù gortozet abaoe keid-all! Ne heller ket kas da galz pelloh seveni promesaou ar Prezidant hag ar gouarnamant. Pe, da nebeuta, divizoud ober **eur rummad kenta a welladennoù**, da hortoz ae reolennoù pouezusa ha vo embannet da houde gand ar Rannvroioù o-unan, diwezatahig.

Dileet eo da Zervij boutin ar skingomz-skinwel 'vel m'emañ bremañ rei d'or yezou, ha d'or yez-ni. Bretoned, eta! hag heb dale hirroh, eul lodenn deread euz ar plas a die beza o hini hervez, ne lavarom ket tra ken nemed promesaou ar strolladoù a gaver e penn ar vro, hogen ivez, arabad ankouaad, **hervez ar reoliadur etrevroadel** bet sinet gand Bro-Hall.

Miz kerzu 1981.

HA LAMMET E VO KUIT ABADENN DELE AL LUN ?

Daoust hag emañ ar brezoneg o vond da goll, e 1982, unan euz an abadennoù, muzuliet ken striz koulskoude, a oa bet asantet rei dezañ en tele? Dre ziouer a zarvez e vo ranket, heb dale moarvad, dilezel ar skingasadenn **Hekleo an deizioù** a vez skignet d'al lun abaoe miz even 1980 hag a vez maget gand filmoù bet savet e-pad bloavezioù kenta **Breiz o vev**. Setu bloaz hanter ma lavarer hag ez azlavarer ne hello ket padoud eur seurt abadenñ ma ne asant ket FR3 implij eul lodenn vihan euz h arhant evid aozha filmoù nevez, sklêr ma 'z eo ne zaleo ket da vond d'an hesk bernig programoù kenta e liou **Breiz o vev**. (...)

Bez' ez eus koulskoude eur hresk e niver hag e padelez an abadennoù tele e brezoneg hag a oa divizet 'barz ar Chart! Ha petra 'ta ez eus bet greet gand FR3 nemed touella ar bobl, gand lakaad adskignadennoù e plas filmoù nevez hag o chom heb

digas ar gwellaennoù bet prometet... ha bet goulennet... ha bet goulennet hag az-
goulennet deg ha deg gwech gand ar strolladoù hag ar Huzul sevenadurel ha gand
an Asambleoù Rannvro ha Departamantoù. Ha diwar-vremañ, pe dizale, setu FR3
o rankoud mond war-gil: en arvar e vezer ne vo mui evid ar vrezonegerien nemed
abadenn-dele ar zadorn. Eun abadenn hag a zalher da skigna da eun eur goude
kreisteiz, d'eur mare ma n'hell ket ar peb brasa euz an dud selled outi...

Ha piou a zo kineg euz an torridigez-kontrad-ze? Peleh klask anezo nemed e penn
FR3 Roazon, pa n'eus ket bet fellet ganto implij an arhant a oa ezomm evid derhel
d'o fromesaou sinet, ha kerkoulz all e Pariz, e penn uhella ar Gompagnunez hag a
zalh ken stard da ziskouez digomprenusted ha skragnerez divez adal ma vez ano
euz rei plas evid yezou Bro-Hall en abadennou ar radio hag an tele.(...)

Penaos e hellfed chom, eur bloavez all c'hoaz d'an nebeuta, gand eur plas war ar
skinwel evid ar brezoneg ken disterig hag a-raog ar Chart hag he reolennoùigou,
hag an dra-ze tra m'eo bet gouestlet gand ar gouarnamant nevez e vefe roet digor
hag eun digor deread da yezou Bro-Hall war ar radio hag an tele koulz ha war an
tachennoù all?

31.12.81.

GALV

Skoazell on-efe ezomm, dreist-oll evid pega goloioù al leorioù. Tu a zo d'ober
al labour-ze er gêr. Evel just ne vefe ket pèet ar re a skoazellfe ahanom (ma vefe
red pèa e vefe gweloh goulenn digand eur mouller ober al labour-ze).
Kasit kelou da VRUD NEVEZ ma'z oh prest da genlabourad er heñver-ze.
Trugarez en a-raog.

E gwerz e ti

BRUD NEVEZ

6, ru Beaumarchais, 29200, Brest

dre chekenn-vank

dre chekenn-bost: 893-94 P Roazon.

Rei a reom priz peb leor, hag e bouez; evel-se e hello ar brenerien gouzoud pegement a
dleont evid ar mizou kas.

Romañchoù, Danevellou, Beajou

- TAD MEDAR** : An tri sotrou (50 lur, 400 g)
Diwar c'hoarzin. (30 lur, 250g)
- F. AL LAY** : BILZIG (40 lur, 450g)
- J. KERRIEN** : Ar Roh Toull. (10 lur, 150g)
- L. IIZAN** : Emgann Kergigu (skrid orin) (40 lur, 450g)
- E. AR BARZIG** : Buhez ha faltazi : levrenn 1 : (11 lur, 150g)
Buhez ha faltazi : eil levrenn (18 lur, 170g)
Kôzioù Tintin Mari (10 lur, 70g)
Kalonou Tregeriad (10 lur, 100g)
- A. AN DIUZED** : Gwad ar garantez (10 lur, 100g)
Pesketêr Enez ar Skom (diwar Lof) (17 lur, 90g)
- PER-JAKEZ HELIAS** : Mojennou Breiz (Ar mor, War drêz ha war veg) (15 lur, 70 g)
Marvailloù ar votez-tan (10 lur, 110g)
Divizou en amzer gollet (10 lur, 120g)
- YVES MIOSSEC** : Eur veaj e Stadou-Unanet an Ametik (15 lur, 200g)
O foeta bro er Hanada (18 lur, 180g)
Drelet ar mor braz (20 lur, 250g)
- JAKEZ RIOU** : Geotenn ar Werhez (34 lur, 200g)
An ti satanazed (15 lur, 200g)
- SELLE-DIVANAC'H** : Thumette Bigoudenne (e galleg hag e brezoneg) (30 lur, 400g)
Danevellou euz an amzer-vremañ: PER TREPOS: Lod all a varv; CHARLEZ AR GALL:
Ar zadornvez Pantekost; PER-MARI MEVEL: ar hleuz; KORANTIN RIOU: Distro ar zant;
JOB ABASQ: Liziri; MY SKAUIDIG: Evel chas ar harter; REMI DRIEN: Maena pro no-
bia (24 lur, 200g)
- MIKAEL MADEG**: Pemp troad ar maout (30 lur, 550g)
GUILAM ER BORG: Obéréu en In-noz. (35 lur, 300g)

AR MARH DALL

Le cheval aveugle

Pennadoù bet dibabet, troet ha kinniget gand ar Bleun Brug.

En danevellou, barzonegoù, istorioù ha pennadoù peziou-c'hoari a zo el leor-mañ,
e vo kavet an elfenn a ra euz Breiz-lzel eun douar a vuhez, a hahar, a garantez,
erfin, eur vro veo.

14 lur (150g)

KOMEDIANED

C'hoariet eo bet ar pezh-mañ evid ar wech kenta gand (1):

Ar beleg.....	Gwenn Kaigre
Ar foll.....	Sylvain Kermoa
Ar gedour.....	Andre Morvan
Ar marhadour kenta.....	Remi Derrien
An eil marhadour.....	Silvi Vigouroux
Ar vamm.....	Chan Perrot
An telenneur.....	Yann Kervoas
Dahud.....	Mari Kermareg
Erwan.....	Jakez Andrew
Ar barz.....	Annaig Abjean
Ar priñs.....	Emilien Balcon
Ar martolod kenta.....	Remi Derrien
An eil martolod.....	Andre Morvan
Ar habiten.....	Gwenn Kaigre
Ar hlasker-bara.....	Sylvain Kermoa
Ar paotr	Yann Kervoas
Paotr ar radio.....	Andre Morvan
Paotr e akordeoñs.....	Yann Kervoas

Kinkladuriou: bet treset gand **Skol an Arzou-Kaer**, e Brest.

Dillajou: **Strollad Penn-ar-Bed**; treset gand **Nina Vidrovitch**.

Sonerez: **Rene Abjean; An Triskell**.

Teknik: **Yann-Ber Gouasdoue**.

Skritell: **Nina Vidrovitch**.

Dillad, Make-up: **Janet Ormrod**.

Leurenneit eo bet ar pezh and **Gwillou Kergourlay**.

C'hoariet eo bet **Dahud** evid ar wech kenta e brezoneg, e Brest, d'an 21 a viz genver 1982, gand strollad **Teatr Brezoneg Penn-ar-Bed**.

Bez' eo **Dahud** an 12ved pezh da veza c'hoariet gand ar strollad.

(1) en urz ma teuont war al leur-c'hoari.

PEVARE ARVEST PEM VED ARVEST

(p. 47 ha p. 59)

